

KIS-592 – Gl. culture ; peinture figurative, abstraite

(GE da RAH – 04 08 98)

[Notenn savet da geñver ur c'henlabour war gentelioù Istor en erdu klasoù dibenn an eil derez]

Kudenn a sav bepred pa vez anv da dreiñ Gl. *culture*, *culturel*, ken liessteriek eo an termenoù-se. E-barzh *Preder* hag *Emsav* dreist-holl hon eus hirlabouret da zec'heriañ ar c'healioù stag outo. Diforc'het hon eus.

STUZEGEZH

(SzAm. *culture*, amprestet gant an dudoniezh c'hallek ha deuet boutin e galleg e-kichen *civilisation* er ster tudoniel klasel) "hollad doareoù bevañ, soñjal, krediñ, kenderc'hañ, h.a. ur strollenn d'un ampoent lavaret, savelet diouzh an erdal gant ur sell mennet ergorel".

SEVENADUR

(Damheñvelster da Gl. *civilisation* er ster istorel), "unvez vras o c'hoarvezout eus hollad kenderc'hadoù ur gevredigezh pe ur stroll kevredigezhioù, sellet da gentañ diouzh an ental evel sevenadoù strollennel, adkemeret a-dreuz ar remziadoù, durc'haet da finvezioù bedel pe drabedel" ; e galleg, er ster-mañ, e reer gant *culture* da bouezañ war arvezioù kefredel hag arzel ar c'henderc'hadoù, gant un erdal istorel strishoc'h : komz a reer eus *civilisation occidentale* hag eus *culture française* ; VALLEE en doa kinniget an termen *sevenadurezh* da envel hollad ar sevenadurioù pe c'hoazh pennaenn ar sevenadurioù, met n'eo ket bet heuliet, marteze en askont eus arliv ideologek un termen oc'h emplegañ e oa pe e voe pobloù hep sevenadur. A-du-rall e reomp gant *hil istor* da verkañ ur redenn seveniñ o redek a-dreuz ar remziadoù, dezhi un derez unvanded dre he finvez ha dreist-holl dre ma kemer pep remziad da gevala kenderc'hadoù ar remziadoù kent (e se e komzer eus un *hil istor* o tremen dre GREGOR, GONIDEG, VALLEE, HEMON betek ennomp — d'an istorourion ha da berzhiaded an hil istor o unan da spisaat e ental hag e erdal..., aze evel just e vez deveizadurioù disheñvel hervez an durc'hadurioù darnel).

STUZIADUR

"Stad un den pinvidikaet e spered dre an anaoudegezhioù kefredel, arzel, h.a.", keal dangorek, arveret bepred diouzh ur savboent darnel : un den stuziet bras en dachenn ouiziel a c'hell bezañ distuz en dachenn arzel.

KULTUR g.

Ober a reomp gant an termen-mañ er ster a roer dezhañ en ideologiezh o ren, termen spoue o lojañ kealioù dispis a bep seurt mennet da gennotañ laosk (ha touellus) ar sterioù all eus an termen : e-barzh *Maison de la Culture* e pleder gant pep tra ha netra ; an termen *culture bretonne* a skriteller gantañ ken stuzegezhioù marv an 19^t kantved, ken al lennegezh hag ar filmoù gallek mennet breton, ken an arzoù delvel pleustret el ledenez, ken ar skridoù er yezh lennegel (evit ar re er yezh arnevez a gouezho e-barzh ar chaodouron d'o zro pa vint anavezotoc'h !).

Dav anzav e chom dispis a-walc'h ar vevenn etre Br. *kultur* ha *sevenadur* : *kultur* hon eus bet tro da arverañ evel kevatal da Gl. *culture (française, allemande, bretonne)*, eleze an arvezioù kefredel hag arzel eus istor ur strollenn. E berr, bewech m'hon eus Gl. *culture* da dreiñ e rankomp prederiañ mat da gentañ ha dibab diwarbouez un dezrann spis. E se, evidon a drofe Gl. *culture de masse* dre Br. *kultur a yoc'h*, Gl. *pratiques culturelles* dre Br. *pleustroù kulturel* (rak *sevenadur* zo ar *seveniñ* hag an disoc'h anezhañ, endra n'eus anv aze nemet a *veveziñ* sevenadoù stampilhet gant ar bolitikerion pe an amaezhiaded anvet ganto, ansevererion peurliesañ an holl anezho). Diwar vont, e verzhan pegen intret eo ar gentel-se gant an ideologiezh : ar mennoz eus mab den a glever enni zo hanezek rik, eleze unventek, bruzunek, hep feiz na dremmwel, o klotañ gant speredegezh vac'h poblañs Frañs hiziv (moarvat pa vo graet istor hon amzer, e vo lakaet marv Diana hag ar *Mondial* evel darvoudoù meur dibenn an eil milved !) Chirac & C^o bezent sioul : graet e vo Frañsizion vat eus hon potached vrezhonek.

En entremar e c'hallfed chom dirak Gl. *Cultures et Sociétés dans l'Entre-deux-guerres*. O vezañ ma ental amañ Gl. *culture* keal ur seveniñ, e ven a-du ganeoc'h d'ober gant Br. *sevenadur* (evit d'an arzourion ha d'ar skrivagnerion diles mont a-rekin d'ar c'hultur o ren — ar beveziñ kulturel er mare-se a veze gourlakaet dre ar skolioù hag ar wask dre ma oa eginiek c'hoazh ar mediaoù a anavezomp). Heñvel dra e rafen gant Br. *kevredigezhioù*, termen hollek, kentoc'h eget gant Br. *kevredad*, pa wisk hemañ un arvez re galvezel. E degouezhioù 'zo e tere ivez *kedvuhez* (Gl. *société* intentet evel *vie sociale*).

LA CREATION CULTURELLE PROPREMENT DITE.

Un trap zo er bomm-se : en ideologiezh o ren, ar *c'hultur* eo da gentañ pezh a vez bevezet ; o vezañ ma'z eus eus ar genderc'herion gultur un niver bihan, e ve enepyc'hek (begennelour, hervez a glever) reiñ dezho ar plas kentañ, ober anezho un diazez d'ar gedvuhez (pa ouzer e vezont dalc'het en arlez ar gevredigezh, pe dre devel warno, pe dre ober idoloù anezho), hag ez ijiner geriennoù pompadus evel *la création culturelle*.

O vezañ ma ne c'hellit ket diskar ar gentel, e rankit moarvat mont tre er c'hoari, nemet oc'h ober gant termenou kevazasoc'h, kevenebañ *kenderc'hañ kultur(el)* ha *beveziñ kultur(el)*. Ne gav ket din e klotfe *sevenadur* amañ. Treiñ a rafen enta : *ar c'henderc'hañ kulturel ent strizh*.

PEINTURE FIGURATIVE, ABSTRAITE.

War se hon eus pleustret e meur a lec'h c'hoazh (sl. KIS-434, La-10, pp. 123-124, en arroud-mañ emañ an dave da bennadoù all e La-06, -07, -08). E berr : Gl. *figuratif*, Br. *diarluniek* ; *non-figuratif*, "*abstrait*", Br. *solluniek*, *andiarluniek*. Gl. *abstrait* zo tremenet er yezh voutin, evitañ da vezañ ankevazas ha distaolet gant un niver a livourion ha gant ar skrivagnerion aketus d'o yezh (da skouer, MERLEAU-PONTY ne ra nepred gant an adanv-se, re all a skriv : "*la peinture dite abstraite*"). Se lavaret, ar geveneped etre livouriezh diarluniek ha livouriezh solluniek ne voe ket ken pouezus ha ma lavar ar gentel. Ar vrasañ doujañs en doa PICASSO evit CEZANNE. A-viskoazh e oar al livourion diles n'eo ket evel diarlun (evel derc'hennadur ul lun all) e talvez un oberenn, met evel sollun (eleze evel lun a zo e sol dezhañ e unan). Met aze kennebeut n'oc'h ket evit adober ar gentel ; en hent m'emaoc'h ne c'hellit moarvat nemet mont a bazennadoù : da gentañ degas d'ar skolidi mennozioù faos e brezhoneg, d'an eil deskiñ dezho devezout reizh dre ar brezhoneg.

Setu penaos e kempennfen an arroud a venegit :

Le mélange des styles est sensible dans le domaine de la peinture. L'opposition entre peinture figurative et peinture abstraite avait dominé les années précédant 1914. Avec Derain et Matisse, les Fauves conservaient la représentation figurative tout en exaltant la couleur et la lumière. Puis le cubisme déforma la réalité, mais pour mieux l'exprimer : avec Braque et Picasso, il s'agit alors de jouer sur les formes et les volumes mais sans remettre en cause l'objet représenté. Il faut attendre 1910 pour que la peinture abstraite apparaisse avec Kandinsky.

El livouriezh edo o ren kemmesk ar stiloù. Er bloavezhioù kent 1914 e voe splann an troc'h etre diarluniañ ha solluniañ. Diarluniek e chomas Derain, Matisse hag ar Faouourion, evito da reiñ ul lec'h brientek d'al liv ha d'ar goulou. Neuze e teuas ar gubourion a zisneuzie skeudenn an traoù war-benn eztaoliñ fraeshoc'h ar werc'helezh : amkan Braque ha Picasso oa c'hoari war ar stummoù hag an ec'honnennoù, koulskoude hep adlakaat an derc'hennañ en argraf. N'eo nemet e 1910 e nodas gant Kandinsky al livouriezh solluniek.

Un nebeut notennoù war an termenoù arveret :

≈ ar brezhoneg a ro tu da gevenebañ pennanorioù koulz ha pennanvioù pe adanvioù :

diarluniañ / solluniañ

(Gl. *figuration / abstraction* — amañ ne zerefe ket *figurer / abstraire*) ;

diarlun, diarluniadur, diarluniegezh / sollun, solluniadur, solluniegezh

(Gl. *figuration / abstraction* adarre) ;

diarluniek / solluniek

(Gl. *figuratif / abstrait*).

≈ dilezet eo bet pell 'zo ar valleeg *gwirvoud* evel kevatal nemetañ da Gl. *réalité*, war se sl. KIS-409, La-09, pp. 439 hh. ; KIS-455, La-10, pp. 202 hh. ; GEAK., p. 199 ; GSTL. ¶¶ 3472 hh. E gwir ez eus ur vordilh a gealioù dindan Gl. *réalité* hag e ranker bep taol klask da gentañ pe re a zeseller. Evit Gl. *réaliste* zo ivez dezhañ ur bern kemeradurioù ; e domani an arz avat e ve gwell ober gant *realour* evel ma reer gant *surrealour*.

≈ Gl. *déformer la réalité* zo un droienn ledanvadek a zo gwell na enporzhiañ e brezhoneg : n'eo ket ar *werc'helezh* a zisneuzier met *skeudenn ar werc'helezh* (evel ma tisneuz ar meskalin, nann ar *werc'helezh*, met *merzhadur ar werc'helezh*).